

457

(374, suite)

Var ton : Cloarec Pempoul.

Blavez mad did, Lوران, me eo ar c'hemenner :
 Perac e crenes-te ? ne don get e coler...
 Un dijentil bras oun, mazers e Plouaret ;
 Ha da voella mignon, goude en drouc-speret.

(375)

Perac na ven-me get da vignon ar brassa,
 Pa zeo gñir e rei din goumit aour o rima ?
 Dre anaoudeguez vad e teuan-ta hirie
 Da souketa did, Laur, chanç ha prosperite.

Pa lar tud da gontre e colli da sqiant,
 E respontan : chut ! chut ! bezit hep nec hamant ;
 Nan, Lوران, va mignon, na gollo birvigen
 E sqiant, rac penos ? n'en deus get un esqen.

En neblec'h neo ur c'hrim bea ur quenaouec,
 Ur vertuz memes eo ebars en c'hec'h Sant-hiec,
 Bez tranquil ta, Lوران, na ni var ar chafot,
 Nemet quillotinet e ve an oll dud sot.

Mar clasqer ober did, Lوران, afferiou fall,
 Me vo da avocet dirac an tribunal :
 Me a rai did cana da gaera canouen,
 Hac e po sur da c'hrac digant ar Varmerien.

(376)

Elec'h cavet prison, marteze vi casset
 Da sacrist da Plougras, pe da vourig Plouaret :
 Agreapla qêlou evidon, va mignon,
 Evit ar fabriqet, ha dreist oll d'ar person !

Rabat eo coll courach, prest eo da jaqeden :

458

Prenna rei dre adré'n gant un acquitellein.
 An deiz vi installlet e cano 1^{er} egl neve, (1)
 Admirer var ma chouc Lauer, ebeul Plouere.

Tapet as po disonch ur placic didrubuil,
 Avantajusoe'h did egnet douguen fusuil; (2)
 Ar fusuil alies a brodu maleuriou,
 En em dorn ne voar get mania an armoù.

Pevar bloas ezout bet e servich ar roue,
 Herves mery ur rollou, herves lerer bemde,
 Ha ne c'heus bet disqet, a lar tud a valiç,
 Nemet en em vlessa ebars en exerciç.

Bea hon eus hon daou calz a adversourien,
 Tud anvius mewibet, pere nint get christen,
 Pere o defe c'hoant da ober o fortun,
 Diwar goust va besqen, diwar goust da vulzun. (377)

Eur mab-caign darbarer, güir vuqel da Satan,
 Pini neus da hanvet en ur son ur forban, (3)
 En deus goulenned lod en peç uquent real,
 Mes foeltr sort na meus bet nemet toliou ractal.

Nén deo get er stum-se e trieter va mignon,
 A respontis dezän : nouit nemet ur c'habon;
 Ha vijes eveldomp bet ebars en arme,
 E pijes sur disqet quelloc'h civilite.

Me a zo den civil, er gout ares, Lauranç,
 Rae ur soudard assur a zo civil en franç.
 Meur a hini neus bet ruban ru gant ar groas,
 Erit beza laret ur c'has arzo ur c'has. (378)

(cardan?
 caudan?)

Te viro dim ive ur plaç en es calon,
 Balamour en c'homzou oun bet bepret güirion,
 Balamour a cardan discourful o forban
 D'ar re arzo dre oll o c'halumi an tan.

(1). - Al 3^{er}in neve.

(2). - Bea gard national.

(3). - An darbarer - mâ en deus grêt ur son da Laur -

459

Clêvet ec'h eus hep dout un ton all composet,
 Ne ouzôn get gant piou, varnomp hon daou eo grêt;
 Var digare lagat ar peoc'h, an union,
 A c'hoes a bep coste tan an division.

Anavezout a res paros vil Plouneve,
 Pa zeo quir eo ermi ec'h eus bet ar rue,
 An eiz varnuguet just demeus a vis qerzu,
 E clasq e rentâ nît e tiser^o mu-ouz-mu.

(379) Gant gaou alar ar son meus hanvel da barous,
 Pod-campr ar paressiou, Plouneveis tud lous,
 Roc ur baros goechal carguet a dudjentil
 N'el bea nemet caer, charmant, mes james vil.

Petra eo ur pod-campr? Excusit, ma ho ped,
 Ur spes scudel vras eo hac arzo destinet
 Da receo arichou, pa gommand an natur,
 An efach hac ar boed pa vent en confitur.

Or, dec gouech e zôn bet e paros Plounevez,
 Ha dec goech excus c'hoas a c'houlân a neve;
 Ja, dec goech meus goelet an oll galenorien
 Pleguet var an hent bras. erit heuill al lezen.

C'hoes ar foeltr voa dre oll; penos na rije get?
 Gant tud voa qer flierius, anter divraguet.
 Capabl voant da lagat er vro ar c'holera
 Dre ar baum a loquent, ec'h, ec'h, et cæterra.

(380) Un hevelep paros a zo ta ur pod camp,
 Ha den var ar poent-se na ello rei deomp lamp,
 Hac ar re zo o chom ebar eur seurt parous,
 A zo, en despêt dè, hanvet tud vil, tud lous.

Bremâ, mignon Loranz, e zout en Plouaret,
 Etouez tud bras ha propr, var an huel placet;
 Ar peiz a lavarân a baros Plouneve,
 A sell hepigen an dud a zo eno hirie.

Trist meurbed eo o stat, red eo en anzarvi;

460

Gouscoude larin didevit o c'houzeli,
 E zeus grêt e Paris er mis - mâ ordrenanç (1)
 Ne vo gen Plouneve pod camp tud fall ar Franç.

E han da achui va zamic canouen,
 Dre laret d'it, Loranz, ne meus get a greden
 E pelec'h da douja birriqen va zizaill;
 Douc gentoc'h houarn ru un den hanvet Lacaill (2).

Goel mad a reget did ar pasur qes gemener-;
 Guelet a res bremâ ne don get e coler;
 Un den gentil bras oun, ma zo en Plouaret,
 Ha da vrassa mignon, goude an drouc-speret.

(381)

fin.

Nota. An teir ganaouen - mâ, adales ar bagen 358, a meus bet
 digant an A. Durand, à Plouaret; geryu 1839.

(Vol. IV, p. 374-381.)
 25 strophes numérotées.

(1). - Bremâ e zeus Voiturien bras da zigas ar galeourien da Vrest, eus a bere
 ne sortont nemet e Brest.

(2). - Lacaill, bourreo e Sant-Brieuc.